

210

## Magerez an drezne. (1)

(f° 207 verso)

Na me me mouez a talent speret da gompozi,  
 Mouez evid e kana er giz ma fote din.  
 me a raffe eur c'himiad, ia na ven ked pel  
 var sujet ar vagerez iaouank deus a gastel.

Me zo bed ouec'h mis varnugent en Kastel magerez  
 en ti ar c'homt an drezne ag ive ar c'homtes  
 ag a meus maget dezan diou zimezel iaouank  
 ag e tond d'or dilezel me mevus rehamant.

Me a meus pourmenet gato dre ar saliou ag ar c'hambjou  
 a dre pariou Kastel pa veze assembliou  
 me zo bed cato (2) ive en alle ar Kernevez  
 hag er maner Kilaodi demeuranz var ar meaz

Me zo bed gato ive nag er bordic ar mor  
 Sellet doc'h ar verdaidi vonet gant ar Kanol  
 Sellet doc'h ar verdaidi e vond da vizina  
 Da Kichen chapel Callot eur plas an devota.

Deus va zi pa sortian me a vel touriou castel  
 hag a digas din da chonch deus va diou dimezel  
 Kalon mam a zo tener en endret he bugel  
 ag kani ar vagerez e Kichen ar c'havel.

}

F<sup>d</sup> Boule'h, 21 8<sup>bre</sup> 1852.

(1). - Peut-être faut-il drezne (par erreur), au lieu de drezne.

(2). - Ms.: cato; lire: gato.